

*Kantikou  
p'ar  
Kernouez*

EN HENOR DA ITROUN VARIA 'SKLERDER (1)

Var don : *Eun Doue a zeu d'ho kervel.*

DISKAN :

*O Itroun Varia 'Sklerder  
Klevit mouez ho pugale ;  
Diouz peb drouk, plijet, Mamm de-  
Hon diouall korf hag ene.* [ner,

Ni ho salud, Guerc'hez Vari,  
En ho chapel Kernouez ;  
Deut omp hirio d'hoc'h henori  
Gant fizianz ha karantez.

Salud ! Rouanez gallouduz  
Hag an env hag an douar ;  
Salud deoc'h ! Mamm garantezuz,  
A greiz kaloun ni 'lavar :

A bep tu ez euz, o Guerc'hez,  
Chapeliou en hoc'h henor ;  
Eno, tenzor ho madelez  
A gaver bepred digor.

Aman, e chapel ar Sklerder,  
Ho taouarn madelezuz  
A skuillas grassou heb niver,  
Grassou kaer ha talvouduz.

Ar vamm, gant he c'hrouadurik  
A veler o tiredet ;  
Ha, gant fizianz, d'ar bugelik  
E c'houlenno ar c'herzed.

Kalz re all a zeu da bedi  
Dirag skeuden hor Mamm vad,  
'Vit goulen ma plijo ganthi  
Parea ho daoulagad.

E miz Eost, d'ar pemped devez,  
Daoust d'al labour, d'ar skuisder.  
Laouen e teu pobl Kernouez  
Da chapelik ar Sklerder.

Holl, 'n ho ti, Guerc'hez benniget,  
Ni zeu da reseo Jezuz ;  
Evit trec'hi an drouk spered  
E ro deomp grassou nerzuz.

Deoc'h-hu, evel guir Vretoned,  
O Mari, ni vo fidel ;  
Kent evit mankout d'ho karet,  
E ve guell ganeomp mervel !

Da holl gristenien Kernouez,  
Ni ho ped, roit ho pennoz,  
Ma vo dalc'het en ho zouez  
Feiz nerzuz hon tadou koz.

Ha ganeomp-ni pa zigouezo  
Heur an diveza stourmad,  
Dre ho peden grit m'hor bezo  
Grass ken kaer eur maro mad.

(1) Kantik reizet a nevez er bloaz 1914.

## KANTIK SANT EUCHER

PATROUN AR BARREZ

Var don : *Lambader.*

DISKAN :

*Aotrou Sant Eucher, hor patron,  
O ni ho ped a greiz kaloun :  
Deskit deomp holl hent an envou,  
Dre ho peden hag ho skoueriou.*

E Orlean eo bet ganet  
Sant Eucher, hor patron karet.  
Gant eur vamm vad ha vertuzuz  
E tesk abred karet Jezuz.

O mil guech euruz ar bugel,  
Pa gav, e kichen he gavel,  
Eur vamm gristen, dezhi guir c'hoant  
D'ober euz he bugel eur Zant !

Eucher a zisprijas abred  
Henoriou ha madou ar bed.  
Doue hebken oa he denzor...  
'N eur gouent e c'houlén digor.

Etouez ar venec'h santella  
E sav buhan d'ar renk kenta.  
Ken brudet eo he barfeted  
Ma 'z eo da eskop dibabet.

Ken humbl ez oa kaloun ar Zant,  
Ma oue diez kaout he asant ;  
Mes, plega rankas koulz koude ;  
Anat oa bolontez Doue.

A bouez labourat a-zevri  
E nevezas an eskopti ;  
He skoueriou hag he bedennou  
A bep tu 'rêas burzudou.

D'an holl dud vad e ro skoazel ;  
D'an drouk spered e ra brezel ;  
Diframma 'ra deuz he skillfou  
Eun niver braz a enëou.

Satan a glaskas, dre venjanz,  
Trei enep dezhan roue Franz ;  
Ar Zant e gaou zo tamallet ;  
Pell diouz he vro ez eo kasset.

Sant Eucher a zigemeras  
Ar poaniou-ze gant eur joa vraz.  
Evit ar Zent, an trubuillou  
A zo eur zoursen a c'hrassou.

C'houec'h vloaz araok fin he vuez,  
Euz he gark e ro an dilez ;  
He holl amzer, divar neuze,  
A dremen o pedi Doue.

Etouez menec'h eun abati,  
Hen doa kavet eur minihi.  
Di eo e teuas Hor Zalver  
Da glask ene he zervicher.

O Sant Eucher, euz lein an Ee,  
Grit eur zell ouz ho pugale.  
Dalc'hit da bedi hep paouez  
Evit pobl kristen Kernouez.